



ALL GUARANTEED VILL



CAN

ha


DISCAN

# Ar Garantez Vil

Ton savet e Pleiben war-dro 1880 ha kanet gant  
an Itron Toullec eus Keraez (Kerne)

Komzou dastumet gant  
**Albert TREVIDIC**

Ton dastumet gant  
**Polig MONJARRET**



Gwechall pa oan-me bihan, me'm boa klevet laret.



C'houi paotred bezit' ta fur, pa tit da glask merc'hed

I

Gwechall pa oan-me bihan, me 'm boa klevet laret (1) :  
« C'houi, paotred, bezit 'ta fur, pa 'tit (2) da glask merc'hed.

II

N'it ket da glask ar re vrao, nag ar re gwall farno,  
Rak alies ouz o heul 'vez troiou divalo. »

III

Me 'm boa gwelet eun (10), eur wech, a oa bet gwall dapet,  
Dont da glask eur plac'hig koant, evitan da bried.

IV

Met henez 'vije trompet (3) koulz d'an noz 'vel d'an de (4)  
Rak ar seurt-se 'vit o zud, n'o deus ket karante.

V

Breman me 'ray eun droiad, da welout me 'gavo,  
Kendalc'h a rin-me da glask, dre an holl pardonio (5).

VI

Ilen am bo kavet unan a vo d'am faltazi  
Biken plac'h yaouank re goant ne zin (2) da frekanti (6).

VII

Erru eo fin ar pardon, c'hoaz n'em eus ket kavet  
Setu aman unan just (7) diouz a-greiz oan laret (8).

VIII

Harpet ouz mur (9) ar vered, 'vel eur plac'h sebezet  
Laret (1) 'vefe eun (10) varo diouz ar vered savet.

IX

He c'hoef 'oa 'kreiz he bizaj (11) 'vel eur plac'h koz kant vloaz,  
Ha hi, ya, me a oa sur, n'he deus ket ugent vloaz.

X

Dre ne welen den ebet o kaozeal outi,  
Me 'gemer hardizegez ha mont d'he saludi.

XI

« Ha rak-se 'ta plac'h yaouank, me 'lavaras dezi,  
C'houi 'pefe ar vadelez da bourmen ganin-mi (12)

XII

Hag evit gwelout hag-hen, (13) 'zigouefe hor sonjou,  
Marteze 'vefe moien (14) d'eomp d'ober marc'hajou. »

XIII

Hi a respontas d'in-me gant muzellou tronset :  
« Ne gredan ket den yaouank, 'peus c'hoant da gaout merc'hed. »

XIV

Rak me 'zo dister a gorf hag ivez a spered,  
Dre se 'm eus tamm c'hoant ebet da blijout d'ar baotred.

## XV

Merc'hed ha paotred yaouank, pa teuont d'ar pardonioù,  
Pa 'vez *marc'hadourz* (15) ganto 'veont (16) *kountant* (17) d'o *gwerzou* (18)

## XVI

Ho *marc'hadourz* (15) plac'h yaouank 'zo henvel o hini,  
Mar kar dont d'am *c'hountanti* (19) e frenin diganti.

## XVII

Me hoc'h ambrougo d'ar gêr, da di ho mamm, ho tad,  
Ha diganto me am bo, marteze va mennad. »

## XVIII

Ma hec'h ambrougas d'ar gêr, da di he zad he mamm,  
An ti a oa tenvel bras, n'oa na goulou na tan.

## XIX

Me a roas daou wenneg dont da gerc'hat goulou  
Evit rei d'eomp sklerijenn, d'ober hor marc'hajou.

## XX

P'oa *clumet* (20) ar goulou ha roet ar sklerijenn,  
Me a oa bet desped d'in, kaout eur falaenn.

## XXI

En eur welout an daou goz a-bep tu d'al ludu  
Ar verc'h 'lavaras d'he mamm : « C'houezit an tan diouztu ».

## XXII

D'ober eur banne souben pe eur banne kafe.  
E oa *deut* (21) ar paotr yaouank d'he goulenn an noz-se.

## XXIII

Hag ar vamm a respontas : « N'eus ket danvez soubenn !  
Hag ar bara 'zo re just da rei d'an *dislangourien* ! (22)

## XXIV

Pac'h eus degaset ganit eun istrogell 'veldout,  
Breman 'c'helli klask da chans, tec'het prim en da *rout* (23).

## XXV

Met an tad oa laouen bras 'vijet graet ar marc'had,  
Evit dezan da c'hellout eva eur voutailhad.

## XXVI

Neuze me 'roas arc'hont, d' 'ont (24) da gerc'hat kafe  
Hag eur podad gwin ardant a oa kerc'het ivez.

## XXVII

Neuze me 'roas arc'hant, d' 'ont (24) da gerc'hat kafe  
Mar plij ganeoc'h 'oan azeet e-kichen va mestrez.

## XXVIII

Met kerkent ma oan azeet me 'santas eur c'houez fall  
Hep ma ouien koulskoude da betra en damall.

## XXIX

Me 'sonje 'n tu all d'an ti 'oa eul loen o vreina  
Met p'am boa bet sonjet mat, gant va mestrez e oa.

## XXX

*Larit* (1) hardiz tud yaouank, me 'm boa mall da guitaat  
Ha me 'zeuas ac'hane 'barz 'oa fin d'ar marc'had.

## XXXI

P'am boa bet va *liberte* (26) me oa lakaet *kountant* (17)  
Gwelloc'h e oa ganin koll va fodad gwin ardant.

## XXXII

Gwelloc'h eo ganin mil gwech birviken dimezi  
'Vit beza *ampoizonet* gant ar seurt loustoni.

## XXXIII

Digant ar seurt loustoni, ken karget a c'houez fall  
Ha n'eo ket met da dorch'i boutou ar merc'hed all.

## XXXIV

N'ouzon ket hag em bo c'hoant biken da zimezi,  
'Vit ma 'teufe eur sonj d'in hag e *laran* (1) hardi :

## XXXV

« N'in ket da glask ar vila 'vel 'm eus graet an dro-man,  
Eur plac'h koant a renkin kaout, pe chom evel breman.

---

(1) Lavaret (larout : lavarout). — (2) teuit, zeuin. — (3) faziet. — (4) deiz. — (5) Pardonioù. — (6) Darempredi. — (7) Dres. — (8) Lavaret. — (9) Moger. — (10) Unan. — (11) Dremm. — (12) Me. — (13) Ma zigouefe. — (14) Ijin. — (15) Marc'hadourez. — (16) Vezont. — (17) Laouen. — (18) Gwerza. — (19) Dic'hoanta. — (20) Enaouet. — (21) Deuet. — (22) I troad stagadennet. — (23) Hent (gant da hent). — (24) Da vont. — (25) Festa. — (26) Frankiz. — (27) Laouen.